



Kousk, Breiz-Izel



An heol a zo kuzet, sethu echu an de,
Me glew ar c'hloc'h o tintal an Ave.

DISKAN

Kousk, kousk, Breiz-Izel, bro dispar,
Sethu an noz o tont war an douar,
Kousk, Breiz-Izel, bro ken mad,
Trouz ar mór don a zav d'az luskellat.

C'houez vad an ed en bleun, hag al lanñalaouret
War ar maeziou gant ar gliz noz a red.

Ar vaëserien a gan, ho destum ho loëned,
Gwerziou Breiz-Izel n'int ket c'hoaz kollet.

An neb a c'houez bemde a c'hounid he repoz,
D'an dud vad Doue en deuz great an noz.

En traonien didrouz, me glev kan an eostik,
Telenner noz, sonnit flour ha dousik.

Diwar Breiz a skeudi an nenv steredennet,
A lavar zo eun Doue n'ho c'haret.

Breiz-Izel, douar sakr, d'a greiz galon m'ho kar,
Bro all ken kaer n'euz ket war an douar.

